

Ha pa oen bihan, bihan, `ti ma mamm ha ma zad,

Me a oe urc'hrouadurig, a oe disaved mat

Hag abred e oen kased pellik mat deus ar gêr,
Evit bezañ studiet e-barzh `n ur seminer

Me n'em boe ket `met eizh vle da gentañ pe oen kaset

D' seminer Plugerneve `vit bezañ studiet

Pe oen bet seizh vle ennan, pe'tramantet war-dro
Err' a re's ganin keloù ma mamm e oe maro

Na `vit klevet kement-se, me `oe diskoñsolet
`Klevet lâret e eo maro ar vamm `nivoe ma ganet

Met ur pennad goude-se `me oe ken gwazh kalonad

Erru'reas ganin keloù e eo maro ma zad

Me `n em lakes da ouelo, na ouelen ket hep sujet,

`Klevet lârt e oe maro an tad `nivoe ma maget

Ha me `hont d'ober ma vak evit monet sa gêr
Ha da lâret kenavo d'an holl er seminer

Pe oen erru war an hent, ur pennad avañset,
Nag ur mesajour youank me am eus rankontret

- Arestet, skolêr youank, ur momentig amzer
Hag a lakin deus ma dorn n'ho hani ul lizher

Hag a lakin deus ma dorn n'ho hani ul lizher,
Hag a zo digaset dac'h digant ho mestrez kaezh

Hag a zo digaset dac'h digant ho mestrez kaezh
`Lâra dac'h mont d'an Argol `vit bezañ skrivagner

`Lâra dac'h mont d'an Argol deus a-berzh he zad,
Ha m' a' pe' komportement, c'hwi rey ur fortun vat

Me `chommes un tamm em sav, na oeren petra d'ober,

O ! pe monet d'an Argol, o ! pe monet sa gêr.

Na ma c'hoer pe a glevo `vin erru `barzh ar vro
`Deuy raktal d'am vrec'hataat `n em lakey da ouelo

- Tevet, tevet, ma c'hoer baour, tevet, na ouelet ket

Yaouankoc'h `vidomp hon daou minored zo chomet

Yaouankoc'h `vidomp hon daou minored zo chomet

Pa gavihet lec'h ho soñj, dimeziñ a rihet.